



Dastumad SONIOU SKANV HA NATUREL

Great gant Prosper Proux (Barz Guerliskin)

Klasket ha moulet a-nevez

gant eur c'hoz Potr Iaouank.



FEILLEN I
Daou wennek

Ar C'hant, 2 skoed



Kovesion ar Pitaouer

AR "PENITENT"

Gant eur glac'har vraz em c'halon,
Ma zad, oun deut d'ho kavet
D'ober d'ec'h eur govesion
Deuz va buez debordet. —

AN TAD KOVESOUR

Dirollet mad ho chapeled,
Bezet gwirion penn-da-benn,
An absolven a velitfet
Mar ho peuz eur gwir anken. —

AR "PENITENT"

A-viskoaz oun bet eur c'hanfard
Eur merc'hetaër ar gwasa ;
Ne oan med eun tammik krennard
Ma karien kalz ho starda.
Pa velen eur plac'h koant bennag
Ma goad ennoun a verve
Ma c'halonik a rae " Tik-Tak. " —

AN TAD

Ne santec'h mann ouspenn-ze ?

AR "PENITENT"

Eur blijadur deuz ar vrasa
Em boa o velet Mari
Beb noz deuz en em dic'houenna
Hag o sikour anezhi. —

AN TAD

Gwelloc'h e vije bet d'ech-hu
Diski ho katekismou
C'hoari kornigel ha dotu
'Vit dic'houenna merc'hejou.
Ped oc'h euz-hu c'hoaz dic'houennet? —

AR "PENITENT"

Ne oun ket ervad, var ma fe,
Rag aboue dek vla tremenet
E c'heulian ar vicher-ze. —

AN TAD

Leret divar-benn ar genta. —

AR "PENITENT"

Oh! va zad, me ho tisfi
Da gavet ebarz ar gear-ma
Eur plac'h ken tentuz hag hi.
Nan, biskoaz n'ho peuz bet gwelet
Eul lagad ken birvidik
Eun tammik korf ken brao stummet
Eur bale ker manifik,
Eur begik flam vel eur rozen,
Eur zellou lem ha lirzin
He bleo dû 'vel eur vouaren.

AN TAD

Kendalc'het beteg ar fin! —

AR "PENITENT"

Dek vla zo bet da veurlarje
Oh ia, sonj mad am eu; dalc'het!
E riz ar pec'hed mignon-ze. —

AN TAD

Leveret mad 'vel ma peuz gret!

AR "PENITENT"

Barz en he zi pa erruiz
E kaviz ma dousik koant
O tilemel krak he c'hinviz. —

AN TAD

Re evuruz e oac'h, kliant! —

AR "PENITENT"

Ober a rea van da ouela
Pa roiz eur pok d'ezhi
Ha me raktal d'he briata! —

AN TAD

Ijin mad d'he c'hon-soli! —

AR “PENITENT”

A grenn-dost e oa eur gwele
Varnezan e oan koueet
Ar rest ouzoc'h koulz ha me. —

AN TAD

Nan da, ne zivinan ket! —

AR “PENITENT”

Eno seiz kwech e tanveiz
Dustu ar frouez difennet
P'hini a gaviz mad iskiz! —

AN TAD

Ma mab, brabansal a ret! —

AR “PENITENT”

Mar ne laran ar wirione
Me c'houlen peza spac'het
Vel eur porc'hel pe eur c'hole! —

AN TAD

Pell-zo ho peuz melitet! —

AR “PENITENT”

Aboue ma meuz bet tanveet
Eur zoubennik ken karabl
E meuz bet ato kendalc'het! —

AN TAD

Terri a rei d'ec'h va, mab? —

AR “PENITENT”

Oh! ia. Santout e ran dija
Ez oc'h eun diviner mad,
Rag tec'hel a renkan brema
Pa me lipet diou loaïad!...

D I V I Z

etre eur c'hliant iaouank hag eur riskerez koz

WAR DON : *Paotred Plouillo.*

1. — AR PAOTR

Leveret d'in, moereb Kato, hec'h ez oc'h koant gwech-all?

AR PLAC'H

O nanbiskoaz, va mignon kez, koantiri zo eun dra fall;
Koulskoude e oan plac'h terru-pl, degajet, kroc'hennet kaer,
Va lanchen distagellet, va lagad lem ha seder.

2. — AR PAOTR

Leveret d'in, moereb Kato, bet ho peuz servijerien ?

AR PLAC'H

O nan biskoaz, va mignon kez, rak n'oull ket ar veleien ;
Koulskoude ne oan ket skornet, plijout a ree d'in Pipi,
Ha pa frote eur plac'h-all e santen 'vel jalouzi.

3. — AR PAOTR

Leveret d'in Moereb Kato, tenereet neuz ho kalon ?

AR PLAC'H

O nan, biskoaz, va mignon ker, rak ar pech a moa aon
Koulskoude eur sulvez pardon e c'houllaz ker brao ouzin
Rei d'ezan eun toullad pokou ma oa ret d'in asantin !

4. — AR PAOTR

Leveret d'in, moereb Kato, oant ket pokou penn-da-benn ?

AR PLAC'H

O nan biskoaz, va mignon ker, n'avanturiz va c'hroc'hen ;
Koulskoude eun nosvez bennag ma oan o prezeg d'ezan
E prezegaz ker brao ive ken a riskiz a gredan.

5. — AR PAOTR

Leveret d'in, moereb Kato, risket ho peuz c'hoaz goude ?

AR PLAC'H

O nan biskoaz, va mignon ker, nemet an noz maleüruz-ze ;
Koulskoude, vit lavaret gwir, aliez pa zivunen
E vijen meurbed souezet o kaout Pipi em barlen.

6. — AR PAOTR

Leveret d'in, moereb Kato, riska raffac'h c'hoaz brema ?

AR PLAC'H

O nan, biskoaz, va mignon ker, gwell ve ganin perisa ;
Koulskoude mar ve red absolu ober ze d'ho soulaji,
Ne me ket asur ar galon da zonet d'ho refuzi.

7. — AR PAOTR

Leveret d'in, moereb Kato, dre an hent ze c'her d'an Nenv ?

AR PLAC'H

O nan biken, va mignon ker, ne gaffet ker reiz hag hen.

AR PAOTR

Ho trugare, moereb Kato, ho kelen na n'eo ket fall,
Ha koulskoude vit 'n eñ zalvi, me gemero eun hent-all.